

Ar beleg : Plijet genoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :
R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.
Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h. R/ : **Ha get ho spered !**

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (bis)**
d'hun douar, roit peoc'h an neañv !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.
Setu Oan Doue, an hini a lam pec'hed ar bed :

R/ : **Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,**
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.

Komunion :

1 Me gav hir an amzer A dremenan er bed, Mar n'am eus ma Salver D'am c'honfortiñ bepred.	Kerzhit, 'm Ael gardien, Da lâret d'am Jezuz : Hepdon eh on e poen, Diskonfort, hircvoudus.
2 Dalc'hmat eh on losket Get tan e garantez, Ha debret ma spered Get e soñj noz ha deiz.	3 Ha pell e vo ret din Gortoz an deiz kaer-se ? Pegourz en ho kwelin, Jezuz, e lein an ne ?

'Cit kloziñ an oferenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : R/ : **Ha get ho spered !**
Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. R/ : **Amen !**
Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : R/ : **Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn :

Ni ho salud get karantez, Rouanez ar Sent hag an Aelez ! C' hwi a zo benniget, Ô pia ! Hag a c'hrasoù karget : Ave Maria !	Benniget eo ivez Jezuz Ar frouezh a ho korf presius, Mammenn a santelezh, Ô pia ! Hag a salvedigezh : Ave Maria !
---	--

Plijet geneoc'h, Mamm a zouster,
P'arrivo hon diwezhañ eur,
Aveidomp get Jezuz, Ô pia !
Goulenn ur marv eürus : Ave Maria !

Parrez KerAnna

27^e Sul ordinal / 6 a viz Gouel Mikêl 2024

Kan digor :

1 Meulit an Aotrou Doue, C'hwi holl, e draoù krouet,
Traoù hag a weler splann, traoù ha ne weler ket,
Meulit e holl gelloud hiniv, àrc'hoazh, bemdez,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !
2 Meulit an Aotrou Doue, ha yenion ha tommder,
Ha c'hwi hañv ha goañv, teñvalded ha sklaerder,
Noz dall a zu an douar, deiz kaer a splann en ne,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !
4 Meulit an Aotrou Doue, Arc'haeled hag Aeled
O chom e lein an neañv, e palez an Dreinded !
Get ho telennoù aour, lârit kanenn an Ne,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie (Berthier)

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek. Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr ar C'henelezh

Hag e lâras an Aotrou Doue : «N'eo ket mat e vehe an den en e-unan; ober a rin dezhañ ur skoazell hañval doc'htañ.» Hag an Aotrou Doue a reas, ag an douar, holl loened ar maeziou hag holl lapoused an neañv, hag o c'hasas d'an den evit gwelet pe anv e roahe dezhe. Hag an holl anvioù a roas an den d'ar boudoù bev a voe o anvioù. Roet en devoa an den anvioù d'an holl anevaled, da evned an neañv, da holl loened ar maeziou, met d'an den ne gave ket ur skoazell hañval doc'htañ. Hag an Aotrou Doue a zegasas ur c'houk ponner àr an den hag e-pad ma oa kousket eñ a gemeras unan ag e gestad, hag e serras ar c'hig àr he lerc'h



Overenn da zonet : 3 a viz Du da 10e30

en-dro. Hag e savas an Aotrou Doue get ar gostezenn en devoa tapet ag an den, ur vaouez, hag he c'hasas d'an den, hag e lâras an den : «Un askorn a ma eskern ! Kig a ma c'hig ! Hounañ a vo galvet gwreg rak ag ur gwaz emañ bet kemeret.» Setu perak e tilez an den e dad hag e vamm, hag en em stag doc'h e bried, ha ne vënt mui ken nemet ur c'horf.»

Setu komz an Aotrou Doue : Bennozh da Zoue !

Psalm 127 : An Aotrou d'hor bennigo holl deizioù hor buhez !

*Eürus out-te a zouj an Aotrou, Da bried evel ur winienn frouezhus
a gerzh en e hentoù. e diabarzh da di ;
Diàr frouezh da labour en em vagi, da vaboù evel plant yaouank olivez
eürus, en aezamant. en-dro d'az taol.*

*Setu perak e vo benniget an den
hag a zouj an Aotrou.*

An Aotrou d'az pennigo a Sion,

ra weli eurvad Jeruzalem holl deizioù da vuhez.

Éil lennadenn : Lennadenn tennet ag al lizher d'an Hebreed.

*Ma breuder : An hini a zo bet lakaet evit ur pennadig izeloc'h evit an Aeled,
Jezuz, eo an hini a welomp bremañ, dre m'en deus gouzañvet ar marv, kurunet a
c'hloar hag a enor, en doare ma talv, dre c'hras Doue, evit pep den, ar marv-se
bet tañvaet getañ. Rak Doue, hag a zo pep tra evitañ ha drezañ, pa faote dezhañ
bleiniñ d'ar c'hloar e-leizh a vaboù, e oa dereat dezhañ lakaat da vout peurvat
dre c'houzañv poanioù, ar pennrenour a zlee o degas d'o salvedigezh. Rak an
hini a santela hag ar re santelaet a zo o-daou a-unan. Ha setu perak Jezuz n'en
deus ket da gaout mezh pa ra breuder anezhe.*

Setu komz an Aotrou Doue : Bennozh da Zoue !

Allelouia :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : Ha get ho spered.

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mark.

Ar bobl : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !

Aviel : *En amzer-se e tostaas Farizianed doc'h Jezuz hag e c'houlennazont hag
aotre en doa ur gwaz da gas kuit e vaouez. Evit en aprouviñ e oa. Eñ avat a
respontas dezhe : «Petra, eme-eñ, en deus Moizez gourc'hemennet deoc'h ? -
Moizez, eme-int, en deus aotreet sevel ur skrid torr-dimeziñ ha kas kuit ar
vaouez.» Met Jezuz a respontas dezhe : «Abalamour d'ho kalon bout kalet eo ma
skrivas deoc'h ar gourc'hemenn-se. Met adalek penn kentañ ar grouidigezh,
Doue en deus o graet plac'h ha paotr. A-gaoz da gement-se e tilezo ar gwaz e
dad hag e vamm, hag eñ en em stago doc'h e vaouez, hag e vint o daou ur c'horf
hepken. Dre-se, ar pezh a zo bet unanet get Doue erbat eo d'an den en torriñ.»
Pa oant en ti, an disipled a reas arre goulennoù doctañ a-zivout kement-se. Ha
respont a reas dezhe : «An neb a gas e vaouez kuit hag a zimez get un all a ra
avoultrerezh en he c'heñver; ha ma argas ur vaouez he fried kuit, ha ma timez-hi
get un all, e ra avoultrerezh.» Setu Komz an Aotrou :*

R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

E-pad ar c'hinnig : Dispozit ma c'halon 'vit ho resev, man Doue

1 Roit din feiz, esperañs, kreñvait me c'harantez

2 Jezuz, Roue an Aeled, a zo àr an Aoter ;

Me 'glev doc'h man galviñ e vouezh lan a zouster.

3 Dait, a lâr hor Salver, dait buan, o ma c'hrouadur ;

Get bugale an dud emañ ma flijadur.

4 Dait, a lâr c'hoazh Jezuz, ha me 'ray sekour deoc'h ;

Ho samm àr ho tiskouez a zay da vout skañvoc'h.

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwï :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neñv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani az a e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Degas 'reomp da soñj ag ho marv, Aotrou Krist savet da vev, Ha gortoz a reomp ho tistro.**

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv. Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion Met hon diwallit doc'h an droug.